

BUE AR ZENT

Savet gant an Otrou PERROT

KURE SANT-NOUGA

Renket a-neve gant E. AR MOAL

RENER "KROAZ AR VRETONED"

Evit Eskopti Sant-Brieg ha Landreger

GANT OTREADUR AN ESKOPTI

Skoudennet gant AR GWENNEK

~~~~~  
HOLL GWIRIOU MIRET  
~~~~~

Dekvet devez a viz Eost

SANT LAURANS

Arzeler ha merzer (259)



Au impalaer Valerian en devoa douget eul lezen neve (258) eneb ar gristenion : « An eskibien, ar veleien hag an arzelerien a vezo lakel d'ar maro kerkent ha ma vefont anavezet ; ar senalourien, an noblantz hag ar vare heien eus Roma a gollo o renk hag o ma-

don ; ha ma talc'hont d'en em zisklerian kristen goude an dra-ze, e vefont dibennet ; — ar gwrage a renk uhel a vezo ive lemet digante o madon ha kaset en harlu ; — servijerien an impalaer o devo anavezet bezan kristen aruk al lezen-man hag o devo dalc'hel goude, a vezo ive lemet digante o madon, ha goude, chadennet ha kaset war douron ar gouarnamant evil o labourat evel sklavourien. » Al lezen ne gouze ket eus ar bobl hag eus an dud a renk izel. An impalaer ne skoe nemet war ar penn. Gouzout a re, pa vije diskaret ar veleien, an noblantz ha servijerien ken galloudus ar palez, petra raje goude ar bobl hep penn, heb arc'hañd, heb iliz ! Ahend-all, ar bobl a oa kabestrel dre eul lezen-all, douget er blavez aruk (257). « Kement-hini en dije c'hoantaet adsevel eur sostieta frenzet dre urz ar gouarnamant, pe ober asambleou, pe derc'hel da zampredi ar berejou, a vije barnet. »

Al lezen douget gant an impalaer, ha votet gant ar Senat eus Roma, a oe ruktal lakel en impli. Eskob Roma, ar pab Sixt, ne zalc'has ket da vezan tapet epad ma oa o

ofis. Kondaonet a oe da vezan dibennet el lec'h m'oa bet tapet. Laurans, an avieler bras, ne oa ket war al lec'h pa c'hoarvezas an dra-ze. KerKent ha ma klevas, e tiredas da lavaret kenavo d'e eskob ha d'e dad.

— Tad, emezan, da belec'h ez et-c'houi heb ho mab f C'houi, eskob, da belec'h ez et-c'houi heb hoc'h avieler f N'oe'h ket boaz da ginnig ho sakriffs heb ho ministr ! Ha displijet am eus-me d'ec'h ? Daoust ha ma c'havet ho pens digalon eun dro bennak f Breman eo d'ec'h gwelet ha kalonek eo an hini hoc'h eus iziet ennan ar garg da rannan gwad ar Christ, hon Otrou f

— Sec'het ho laeron, ma mab, a respontas an Tad Santel, n'ho tilezan ket ; brasoc'h stourmad evit ma hini a zo ouz ho kedal. Me zo koz ; ar bean am bezo da c'houzantv n vezo skantv ; mes c'houi zo ynouank, hag eur viktor brasoc'h ha gloriozoc'h ho pezo da c'houid war hon enebourien. A-benn tri devez e heuilhet ac'hanon.

Laurans a vije gallet kregi ennan war an tól ; mes ar vourrevien o devoa eur meanoz-all ha n'o devoa ket c'hoant d'hen diskuilh re abred. An neuz a rejont da vezan dall ha bonzar epad ma komze an daou xant. Sant Sixt a oe diskennet er c'halakombou ha dibennet war ar gador m'oa bet ken alles aezet warni evit keless e hobl. Pevar eus an avielerien a c'houzantvas eun bevelep maro war e lere'h. An daou avieler-all a oe ive merzarriet er memes devez, mes en eul lec'h-all.

Goude merzerenti ar pab, an impalaer a c'hoantaas kemer kement a oa d'an Iliz. Diskaret ar penn, sosiele ar gristenien, war e veno, a oa dismantret. Rak-se, kement a oa d'ar sosiete-ze a dlee dont d'ar gouarnamant. An digare-ze n'en devoa na muioc'h na nebeutoc'h a dalvoudegez eget hini gouarnamant ar Frans, en de a hirie. Fazian ré ; rak herve lezen Rom, ar sosieleou, ar re zoken n'o devoa, en doare ebet, ôtre ar gouarnamant, eur wech freuzet, a c'halle rannan etre an dud a oa enne kement o devoa ; hag an treo n'hallent ket bezan rannet a dlee bezan gwerzet hag ar priz lodennet etre ar sosietourien. Setu penos e oa al lezen. Mes petra eo al lezen dirak an verz f Ar gouarnamant, goude laerez o madou, donar ha lie, a falveze gantan breman kaout o arc'hant.

Mes n'halle ket ober an dra-ze heb an avieler bras. An avieler kentan en devoa ar garg eus an holl vadou, ha d'ar marc-ze, etre ar gristenien gentan, kalz treo a oa boutin. Hen oa ar gouarner bras. Ar veleien, an dud fidel, an intarvezed, ar viored, ar beorien, en eur ger, kement-hini

a c'hede o bevanz diouz an Iliz, kement-hini a labourer war-dro ar berejou hag an ilizoù, a oa dindannan. Rak-se, reuk an avieler bras a dene dioustu goude hini ar pab, hag hen eo a gemere e blas, peurvuian, pa varve.

Avieler sant Sixt oa Laurans. Espernel oa bet, hen gwelet hon deus, en esper e leuje da anzav d'ar gouarnamant pelec'h e oa madou an Iliz.

Galvet dirak prefed Rom, Kornelius Sekularis, homan a roas urz d'ezan da zigeri tensonion an Iliz ha d'o lakal etre daonarn ar gouarnamant. Ar zant a c'houlennas amzer evit ober an inventer aneze. Tri devez a oe roët d'ezan. Laurans a stagas gant al labour raktal hag a ruinas etre ar gristenien ezommek kement a chome c'hoaz etre e zaouarn. Neuze e kemennas d'eze holl en etn gavout, d'an trede devez, dirak li al lez-varn.

D'an devez merket, Laurans, ouz e hent holl beorien Iliz Rom, tud mac'hagnet, dall, kanna, notet o izili, a yeas dispart dirak ar prefed.

— Setu aman, emezan, tensonion an Iliz ; ouz o bevanz hag o gwiskan, e lastamomp en neuv pluvidigez vras.

Kounnaret, ar prefed a roas urz ma vije diwisket ha skoet gant skourjezon, begou honarn d'eze. Droust d'e gorf freuzet ha d'ar gwad o poulladan dindannan, ar zant a chome laouen ; ne flove nemet e vuzelloù ; pedi a rê e Zalver Jezuz. Ar prefed ne zigounnare ket.

— Gouzout a ran, emezan, e c'hoantsez ar maro ; mes ne fell ket d'in e varvles prim ; da boanion a vezo padus.

Hag e reas digas dirazan ar beaviachou impliet evit boureveli ar gristenien. Ar merzer a respontas :

— C'hoantâl a rel ma spoutan ; mes an Doue a zervijan a zo ganin ; n'am eus aon ebet rak ho tourmanchou.

Hag epad ma skoed warnan gant bizier, ha ma teved e gostezion gant eun honarn ru, e pede e Zalver : « Jezuz, Mab unik ar gwir Doue, grêt trugare d'ho servijer a fell d'ezan anzav ho hano ha kreski ho kloc'h en kreiz an tourmanchou.

Kredi a rê e oa o vont da vervel dindan an hollou, hag e pede Jezuz da zigemer e ene. Mes eur vouez eus an neuv a lavaras d'ezan : « N'eo ket c'hoaz achu ; stourmajou-all 'zo ouz da c'headal. » O klevet ar vouezze, eur zoudard, hanvet Roman, a 'n em zisklerias kristian, hag a lavaras da Laurans : « Me wel dirazout eun den yaouank eus ar re gaeran o sechan ar gwad eus da c'houllou ; ro d'in prim ar vadeziant. » Ar zant, digaset d'ar prison war urz ar prefed, evit m'en dije amzer da zaouri e dourmanchou.

a vadezas ar zoudard. O vezan klevet an dra-ze, ar prefed a reas skourjezan ar c'hristen neve hag hen dibennan.

Deut oa an noz. Daoust da ze, ar prefed a reas digas adarre Laurans dirazan :

— Ma ne fell ket d'it senti pelloc'h ouz an impalaer, an noz pen-da-ben a vezo laket d'az bourrevi.

Ar merzer a respontas :

— N'eus mui a noz evidon, n'eus mui a denvalijen ; pep tra evidon zo beuzet er sklerijen.

Néuze ar prefed a reas digas eur c'hrih houarn, a lakas astenn ar zant war ar gwele-ze hag ober tân d'indannan. Ar vourrevien, gant ferc'hier, hen trec'hoñ distroevit kreski al leskadurez. Laurans ne ...otante santout netra : « An tân-ze, emezan, a zo evidon evel eun ezen fresk ; mes c'houi a vezo devet en tân a bado da viken. » Hag en eur dreñ warzu ar prefed : « Ne welet-hu ket on rostet awalc'h diouz an tu-ze, grêt distrei ac'hanon... Setu ma 'z on breman poaz awalc'h ; n'ho'h eus nemet dibri. » Eun nebeut goude e lavaras : « Mil trugare d'ec'h da vezan ma c'havet din da vont en ho rouantelez. » War ar c'homzou-ze, e roas e ene da Zoue, d'an 10 a viz eost 259.

B O K E D

En gwirione, en gwirione, hen lavaran d'ec'h, ma ne varv ket ar c'hreunen winiz a goue d'an douar, e chomo hec'h-unan ; mes ma varv, e tougo kalz frouez.

Neb a gar e vue, he c'hollo ; hag an neb a gasa e vue er bed-man, he mir vit ar vue peurbadus.

AVIEL SANT YAN XII. 24. 25.

